

Fañch an Uhel : (Plouared 1821 - Kemper 1895)

Ar pardon- Mona.

Taolenn

Ar pardon

Mona

Ar pardon

Yez Treger

D'an Itron A. Penquer.

(*Modernnaet eo bet an daore-skriva*).

I

Goude tremen parkou, prajou leun e vleuniou,
Koajou leh ma kane an evned o zoniou,
E oam degouezet tost, dre eun hent don ha moan,
Da di koz ha santel an aotrou Sant Erwan.

Ha me gweled o vond a-raog din eun tammig,
Jenovefa Rozel, ar hoanta da blahig
A oufe den kavoud en douar Briz-Izel,
Ha ken kaer kempennet ! Ouz eun êl 'oa heñvel.

« Demad deoh, Jeno goant ! Jezuz, c'hwi 'zo faro ;
M'ho koulenn ar genta 'vid ober an dañs-tro. »
« Trugarez, Alanig ; mar don-me gwisket kaer,
'N'eo ket evid dañsal ; c'hwi 'zo eur goapaer. »

« Me a baeo laouen eur hant alamandez,
Mar n'ho kwelan emberr, bleunig a garantez,
En-dro da Jolori¹, ha krog en dorn Gabig...
Gabig 'zo eur paotr koant ; na ruziet ket, merhig. »

II

Kerkent Jenovefa ez a, skañv, er vered.
Ar gousperou a oa a-nevez deraouet ;
An iliz a oa leun, ha war ar voudenn hlaz,
Evel kalz a re all, 'taoulinas, 'tal ar groaz.

Indan ar gwez ivin, pe harp er mogerioù,
Diskabell, daoulinet, dre-oll 'oa bagadou,
Ha paotred ha merhed, 'n o dorn o chapeled ;
Med neb levr na welis, kaer 'oa din selled.

Klevet e veze sklêr mouezioù ar ganerien,
O skrijal, o youhal pep hini a-bouez-penn ;
Ha na souezet ket, oll o-doa leinet mad,
Evet nebeudig gwin, ha sistr a-leiz podad

Dreist-oll 'veze klevet mouez. Joll Kerborio.
Hg hini Eflammig euz a Gerloho.
Setu 'r *Magnificat* ! Sevel 'ra pep unan,

¹ Jolori : **notenn gand an oberorr** : Ano eur soner-baleer anavezet mad er vro.

Hag e kresk en iliz hag an trouz hag ar han.

Setu ‘r proesion ! – Ar hleier ‘zo en brall,
Ken a gren beg an tour, ken ‘glever o strakal,
Gand an nerz, koad ar stern. Setu ar banniel braz
O tond dre an nor-dal. Gwelom piou eo ar gwaz.

Robardig ar Manah ! Hennez eo ar hreñvañ
A dud yaouank ar vro ; Hennez ‘zo eur paotr mad !
Meur a blah warnezañ a dalh o daoulagad.

A, eil banniel a zo etre daoudorn² Gabig ;
E zellou a bep tu a glask he halonig.
Goude gweled a-leiz merhed gwisket en gwenn,
Koantig oll, koantig oll, gand peb a houlaouenn.

Neuze, a-raog an deiz, kalz a êled vihan
A skuill a-hed an hent bleun-burlu ha balan,
Indan treid ar beleg a zoug ar zakramant
En aour melen a luh en heol ‘vel diamant.

Kleier, taboulinou, a zon uhel ha sklêr,
Ha tennou pistolenn ha fuzul a laosker ;
Tan ha trouz, kroz ha kan ; kan an dud a iliz
A bign beteg Doue, gand *Ora pro nobis* !

War-lerh e teu ar bobl, da genta ar baotred,
Hag ar merhed goude, ‘n o dorn eur chapeled ;
Hag e pedont Doue, hag ivez Sant Erwan,
Da gaoud oute truez, da venniga o foan.

Hag e daou du an hent ‘weler war ar hleuziou
Paotred ha merhed koant e-touez an oll vleuniou,
Bleun spern ha bleun balan. Bete war ar brankou,
Er gwez, ar vugale a zo a-dorkadou.

Degouezet en dachenn, gand e zorn e-unan,
Ar person a laka an tan er bern balan.
« An tantad ! an tantad ! » An oll a you, a you !...
Marv e’ an tan ; bremañ e’ tro ar benviou³.

III

O ! setu Jolri diwar e varrikenn
A halv an dud yaouank evid an abadenn !
Kalonig ar merhed a lamm oh hen kleved,
Hag o lagad ivez ‘zo birvidig meurbed.

‘N em voda a reont oll en-dro d’an dachenn,

² daoudorn : daouarn.

³ ar benviou : **notenn an oberour** : *benviou*, et non *biniou*, comme on écrit ordinairement ; c’est le pluriel de *benveg*, ouil.

Kempennet ar haerra, gante oll war o fenn
Koefou dantelezet, ha peurvuiañ ken koant !
En sellou pep hini e weler sklêr e hoant.

Ar baotred a dosta, da ober o dibab :
O ! Doue d'o miro euz ar re a ra goap !
Ar re na gavont ket, ar re-ze a hoarz glaz,
Hag en-kreiz o halon o gwarizi 'zo braz.

Ha bremañ sellet mad ! Pebez da levenez !
En despet d'an tommder, ha d'ar poultr, ha d'ar c'hwez,
'Vel ma lammont en êr ! 'Vel ma kemeront poan !
Nan eo ket, me 'oar vad, en enor da Erwan !

Ar soner ne bad mui, ha kaer en-deus evañ,
E alan 'zo re verr, hag e krier dezañ :
« on 'ta, soner ! son 'ta ! Rag ken a vo kuzet
An heol,n'az-po ket peuh ; ev, son, ha son bepred ! »

IV

Hogen ne welan ket Jenovefa nebleh,
Na kennebeud Gabig : kement-se 'ro din neh,
Rag ne oulan ket koll eur hant alamandez :
Klaskom, eun tu bennag int eet d'ober allez.

Nag a bobl er pardon ! Koanta⁴ da blah aze
Indan ar bod-spern, war ar hleuz 'n he hoañze' !
Braoa ma'z eo aze ! boud ganti e karfen !
Eom kuit, rag aon am-eus e trofe din ma fenn.

Jezuz ! 'vel m'eo faro an dud yaouank bremañ !
Setu ar haner dall ! Marteze eo amañ
O havin, o selaou eur ganaouenn nevez
Greet da ziu galonig klañv gand ar garantez.

Nann ! An dall koz a gan ar werz gwall-druezuz ;
Eul lestr kollet er mor, dre eun amzer spontuz.
Gwelom, gwelom pelloh. Setu Youenn Gorvel,
'N e hourvez en douvez, mezv evel eur porhell !

Nag a dud hag a drouz indan an dinell-ze !
Red eo lared e vent oll mezv-dall dre aze.
Aon braz am-eus na ve, a-raog noz, taoliou-dorn,
Ha goude, marteze, eur re pe dall, pe vorn.

Setu Job Kerival ! « Mar klaskez Annaig,
Ma faotr kêz, goar ez out diwevad eun tammig.
Emañ du-ze d'an neh, korog en kazel Frañsez ;
Me 'gred ne zisplij ket ar paotr d'ar bennherez.

⁴ Koanta : tergerieg : an derez uhella e leh an derez estlamma. Memez mod izelloh gand "Braoa"

« Med te, lar din, d'az tro, ha n'az-teus ket gwelet
Jenovefa Rozel ? – « Ya da ! rag hi he havet
Am-eus o vond d'an traoñ, ha n'eus ket c'hoaz gwall-bell ;
Da gimidi eh ee, me a gred, d'ar chapel. »

« He-unan ez oa hi ? » - « Nann, gand he dous Gabig ;
Hag eñ 'oa ken laouen, hag hi 'oa ken koantig ! »
« Trugarez ! War o lerh me red, hep koll amzer.
Setu an abardaevez, ha poent eo mond d'ar gêr. »

« N'emaint ket er chapel : eur bedenn verr d'ar Sant,
Ha goude-ze en hent ! Rag, Jenovefa goant,
M'ho kavo c'hoaz 'n eun tu, ha ganeoh ho Kabig,
War-lez ar wenojenn, pe indan eur bodig. »

« Demad deoh, ma moereb, Gaodig ar Jabadaou !
Laret din pegement e werzet ar hant kraoñ ? »
« Ma Aotrou mad, 'vidoh ne vo nemed tri real⁵ ;
Triweh gweneg 'werzan, heb gaou, d'an oll dud all.

Ar hraoñ 'zo kerraet ; netra ne hounezer,
Ha poan 'vez o veva, ken fall m'eo an amzer.
Gwechall, an dud yaouank 'brene d'ar merhed koant,
Gand an ostiz bremañ eh a o oll arhant. »

« Setu aze arhant : tavet, bregouillerez⁶,
Ha roet din, buan, eur hant alamandez. »
« Doue d'ho pennigo, ha da roi deoh chañs vad !
C'hwi hoh-eus kalon vad, ya, kerkoulz hag ho tad. »

D'ar gêr, d'ar gêr bremañ ! Leun eo an hent a dud
O tond diouz ar pardon : ha c'hoarz, ha kan, ha brud !
An aluzenn d'ar paour ! D'ar paour-kêz dall ha koz,
Na wel gwell da greisteiz eged da hanternoz ! »

Hennez eo an dall koz Robart Kerbastiou
A ganas din liez ha gwerziou ha soniou.
« Ya, setu daou wenneg, dall-koz, en ho skudell. »
« Bennoz Doue warnoh, gras deoh da veva pell ! »

V

Braoa da abardaez ! – « M'ho kwel aze, Laouig !
Kaer hoh-esu 'n em guza ; koantig eo da dousig ;
Med lar din he ano. Perag 'ta ma ruziez ?
Nan eus forz he ano, koant eo da garantez.
Lar din, d'an nebeuta, ha n'az-teus gwelet

⁵ tri real : **notenn e galleg, gand an oberour** : Les paysans bretons comptent par réaux, jusqu'à l'écu de trois francs ; un réal vaut vingt-cinq centimes. (Eveljust ez eus kaoz euz al lur a veze implijet en amzer-se).

⁶ bregouillerez : radoterez.

Jenovefa Rozel war du-ze o voned ? »
« Ema 'paouez tremen ; er penn all d'al laneg
E tleet he havoud, pe 'barz ar valaneg. »

« Trugarez, ha chañs-vad ! » Son skiltr ar benviou
A deu beteg ennon, gand c'hwez-vad ar bleuniou.
Setu a-dreg ar roz an heol, hag eñ izel :
Gwerz *Kloareg al Laoudour* a ganer du-hont pell.

Piou a welan du-ze indan ar wezenn faou ?
Jenovefa, me 'gred, hag he Gabig, o-daou !
« An avel a zo fresk aze war lein ar roz,
Ha pa vezer diwezd, Jeno, ar vamm a groz ?

Med setu peadra d'he lakaad da devel,
Setu alamandez da rei da bep bugel,
D'ar breurig, d'ar hoarig, ha d'ar vamm ha d'an tad :
Kollet am-eus, paea a ran, a galon vad.

Doue da venniga bepred ho karantez,
Ha da roi deoh Gabig da hanter-tiegez !
Na ruziet ket 'vel-se, a-raog ma vo tri miz,
Hoh eureujo ho-taou ho person 'n e iliz. »

VI

Brao eo bale bremañ, ha mond dre an hentchou,
Ar gwenojennou leun a hwez-vad, a vleuniou !
Setu o tond, war-lerh teir flah, teir farodez,
Gand tavañjerou ruz, ha koefou dantelez.

Gwelom eta piou int. « 'Vel ma hastet, merhed !
Kalz hent on-eus d'ober, hag an heol 'zo kuzet ! »
Hag ar mammou a groz d'ar plahed diwezd :
Ar soner 'zo kirieg. » « Ar soner ? Nann avad ! »

« Noz vad deoh koulskoude, ha gras da vond digroz⁷,
Ha da gousked ervad en ho kweleou-kloz !
Hag ar plahed en hent, da hasta, da redeg,
A-dreuz parkou, koajou, ha prad, ha balaneg ! »

Med setu-me ivez degouezet en toull ma dor ;
Fantig, euz ma hleved, a deu hag a zigor.
Hag en noz, dre ma huñvre, 'welin, c'hoaz ar pardon,
Jeno ha Naig koant, ha Jolori o son.

⁷ digroz :ar hontrol euz "kroz".

Mona

Klemmgan

War lez ar ster, he zreid en dour ;
Aezet war ar hlazenn flour,
Eun abardaez, Mona Daoulaz
'Oa er prad, indan ar gwern glaz.

Truezuz ha stouet he fenn,
'Oa ar plahig gand heh anken ;
An daerou euz he daoulagad,
'Steredenne war yeot ar prad.

War ar skourr eun evnig bihan
'Lavaras neuze dre e gan :
« N' strfuillet ket an dour, plahig,
Er giz-se, gand ho taou droadig. ;

Rag n'hellin mui gweled ma skeud,
Na stered an oabl kennebeud :
Selaouet pedenn an evnig,
N' strfuillet ket an dour, merhig ! »

Monig a lavaras neuze
D'an evn a gomze er stumm-ze :
« N'az-pezh doan, an dour strafuillet
Hebdale pell vez sklêr ha nêt. »

Med siwaz ! an deiz ma teuis
El leh-mañ gand Yannig Karis,
An hini am-eus re-garet,
A ! neuze e oa dit lared :

« O ! na strafuillet ket, Yannig,
Kalon hag ene ar plahig,
Ne vont⁸ ken glan, ne skeudont ket
Ar stered, an heol benniget ! »

⁸ vont : ve vefont, ne vezint. Ne skeudfont, ne skeudint.